

GWERS

ANN OTRO SANT JEG

PATRON PARROUZ EVIAZ.

War don : *Litaniou ar Werc'hez, enn brezonek.*

O Tad, o Mab, o Spered Glan,
 Hon zikouret kuitibunan,
 Da veuli neb hoc'h euz meulet,
 Ha karet neb hoc'h euz karet.

Da Jeg gwez-all hoc'h euz karet :

« Te a zo ma mignon parfet :

« Goulenn ann oll vad a gari,

« Me roo d'id pezh a c'houli.

« Netra ouz-it te ne nac'hin :

« War vor ha douar ez klewin,

« Vit m'ho do feianz da vroiz,

« Da laret *Ora pro nobis.* »

Sant Jeg, sant vez (1) hon bro breton,

Gloar hag enor vraz hon c'hanton,

Feianz hon euz oll ho proiz,

Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, map Rouane ar vro,

Ha ganet daouzeg kant vla so,

Feianz hon euz oll ho proiz,

Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, map vez eunn ti zantel,

Map Britella, map Juhael,

Feianz hon euz oll ho proiz,

Da laret *Ora pro nobis.*

) Laret a ve c'heaz eves, cus, clec'h laret eves, ves. (P. Gr. de R.)

Sant Jeg, chomm er gear ma karjac'h,
Roue, er bed-man, e vijac'h.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, dre zisprizans ar bed ;
Ho ti roial hoc'h euz lezet.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, evel eur paour gwisket,
El lec'h ho sae pourpr herminet,
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, dierc'henn o kerzet,
Goude ho karraous alaouret,
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, gand eur vazik kepken,
Hep goart na kleve d'ho souten,
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, enn Pikardi, ermit,
C'h euz goneet kalz a verit.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, tri vanati c'h euz gret,
Gand Gwarnier ho tiskibl karet,
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, c'houi hoc'h euz repuet
Jezuz enn giz eur paour gwisket,
Fianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis.*

Sant Jeg, ho tiskibl a glevann
O klemm pe ro ann tamm diwan,
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis*.

Sant Jeg, n'hoc'h euz tamm bara bet,
Doue ro d'hac'h, pe 'c'h euz roet.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis*.

Sant Jeg, enn Rom c'houi a zo bet,
Ha relego hoc'h euz kavet.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis*.

Sant Jeg, vez kear Rom distroet,
Gweled d'eunn dallez 'c'h euz roet.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis*.

Sant Jeg, arog mac'h oc'h marvet,
Ele enn dro d'hac'h zo klevet.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis*.

Sant Jeg, c'houi zo marvet joauz,
Enn kreiz sklerijenn burzuduz.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis*.

Sant Jeg, patron mad Eviaziz,
A dre-oll e ter d'hoc'h iliz.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis*.

Sant Jeg, medisin ar gwellan,
Evit pep klenvet ho kavan :
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *Ora pro nobis*.

Sant Jeg, mad eneb ann dersionn,
Eneb drouk penn ha drouk kalon,
Fianz hon euz all ho proiz,
Da laret *ora pro nobis*.

Sant Jeg, d'ho kad 'teu ar mammo,
Pe ve klanv ho bugaligo.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *ora pro nobis*.

Sant Jeg, dour divez hon fantenn
D'ann daoulagad 'ro zoulajenn.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *ora pro nobis*.

Sant Jeg, hon mir ouz ann tan gwal,
Hag a dorr ar prosejo-fall.
Feianz hon euz oll ho proiz,
Da laret *ora pro nobis*.

Sant Jeg, kalz a dud, 'vel gwez-hont,
Pep bla eunn dra d'hac'h a oestlont.
Feians hon euz oll ho proiz,
Da laret *ora pro nobis*.

(*Evid achui leret teir gwez :*)

Sant Jeg, sur da vean klevet,
Doue hen deus-han bet laret,
Feianz hon euz oll ho proiz
Da laret *ora pro nobis*.

Binnigan a reomp ar wers-man a gevomp mad. Neb a gano anei gant doujanz Doue, e roomp d'ehan da c'honit dacu-ugent devez induljanso.

San-Brieg, enn eizved a viz gouelen 1881.

† AUGUSTIN,

ESKOP SAN-BRIEG HA LANDREGER

Gwers Sant Jeg 'zo bet zavet daou c'hant vla 'so (1681-1703) gant Breur Augustin ar Sére, person enn Eviaz ha manac'h vez ann Abatti (Beauport). N'euz ket pell eo bet kad er Pann-Bian.

An Antwan Bon, Kure Traougeri.

Landreger, e ty intañvez AR FLEM, Moular.